

AVANTUR AR C'HAR TENNOÙ-POST...



Orin ar c'hartennoù-post

Ar gartenn-bost skeudennaouet kentañ a oa bet kaset e 1840 gant ar skrivagner saoz Theodore Hook... dezhañ e-unan. Ar gartenn vristol-se adkavet e 2002 eo ar c'hoshañ kartenn-bost a oa bet kaset. Anv zo eus un dra dibar ha prevez avat.

E 1865, e-pad kuzuliadeg ar post aostrian-hag-alaman e voe krouet meizad ar c'hartennoù-post.

E 1869 e voe lakaet kartennoù bristol melestradurel e gwerzh. Berzh bras o doa graet : kerkent hag an deizioù kentañ e voe gwerzhet 140 000 skouerenn ha goude 10 milion a skouerennou e-pad ur bloaz. E kalz broioù e voe degemeret ar soñj buan.

Brezel 1870 : ar c'hartennoù-post kentañ e Frañs. Ne oant ket ofisiel.

E-pad seziz Pariz e vezent kaset gant baloñsoù-post e doare da vont dreist linennoù an enebourien, ar pezh a roe an tu d'ar sezizidi da gaout darempred gant o zud-nes.

War-lerc'h drouziwezh Sedan e krouas Gambetta ur c'hamp e-kichen ar Mañs evit Arme Breizh da zont. Tost da 80 000 gwaz a voe bodet ennañ. Kenskrivañ gant o familh a roe kalon dezho en ur mod met berr en em gavas ar paper ganto. Léon Besnardeau, un den hag a zalc'he ul levr di e-kichen ar c'hamp, a zeuas ar soñj dezhañ da zidroc'hañ goloioù ar c'haieroù, a oa bet gwerzhet o follennoù gantañ dija, e hirgarzennoù bihan. Buan e oa deuet an danvez da vankout ha lakaat a reas neuze moullañ kartennoù gwenn e ti Oberthur e Roazhon. Ar meneg « Souvenir de la Défense Nationale » (« evit Derc'hel soñj eus an Difenn Broadel ») enskrivet war ar skeudennoù a ro da soñjal e voe savet ar c'hartennoù-se war-lerc'h brezel 1870 evit ar soudarded deuet da birc'hirinañ. Gant an dra-se, ma ne c'haller ket ober krouer ar c'hartennoù-post eus Léon Besnardeau, e c'haller ober anezhañ ar pennaraokaour anezho memes tra. Dellezek eo eus an titl-se.

1872 : gant al lezenn e voe ofisiellet krouidigezh ar c'hartennoù-post e Frañs. Daou batrom e 2 ha 3 gwenneg a voe embannet. 7 412 700 a skouerennou anezho hag a voe gwerzhet adal ar sizhunvezh kentañ.

Moulet e vezent gant melestradurezh ar Postoù hepken ha gwerzhet e vezent er burevioù-post hag en tiez-butun. E stumm kartoñsoù 8x12 cm e oa ar c'hartennoù-se, gant un tu gwerzh evit skrivañ hag egile, moulet, evit lakaat ar chomlec'h.

1875 : lezet e voe an holl da embann kartennoù-post gant ma virfent ment ha pouez ar patrom melestradurel. Kregiñ a reas ar genwerzherien da lakaat moullañ e-leizh a gartennoù brudañ. Gant un dekred e voe berzet sevel kartennoù-post a yae a-enep ar vuhezegezh vat hag an ensavadurioù.

1889 : ar c'hartennoù-post skeudennaouet kentañ savet e Frañs a voe embannet da-geñver an Diskouezadeg Hollvedel. Pemp engravadur savet gant Léon-Charles Libonis hag a daolenne an Tour Eiffel a voe gwerzhet 57 5000 skouerenn anezho dindan 20 devezh.

Gant Dominique Piazza, ur paotr eus Marsilha, e voe kroget da implijout luc'hskeudennoù kentoc'h eget engravadurioù evit kas skeudennoù eus Marsilha d'ur mignon divroet. Kenwerzh a reas Piazza gant se, met ne c'hallas ket marilhañ ar breou. Adkemeret e voe e vennozh gant embannerien ha moullerien eus Pariz. Neuze e voe ledet gant ar c'hartennoù-post an implij eus al luc'hskeudennoù ha ne vezent implijet diagent nemet gant an dud uhel.

1900/1920 : an oadvezh aour

E deroù an 20^{vet} kantved e ra berzh ar c'hartennoù-post :

- Gant an deskadurezh publik digoust ha ret e c'halle renkadoù sokial nevez deskiñ lenn ha skrivañ.
- En holl gêriadennoù e tremene tud ar Post.
- Tamm-ha-tamm e veze muioc'h-mui a douristed ha gant-se e rae berzh marc'had ar c'hartennoù-post.
- Dre ma veze ingalet stank al lizheroù e oa deuet ar c'hartennoù-post da vezañ un doare kelaouiñ a-bouez.
- An timbroù evit ar c'hartennoù-post ne oant ket ken ker hag evit al lizheroù.

E pep lec'h e veze prenet ar c'hartennoù-post : bravigourien, mekanikerien, marc'hadourien-vutun, ispiserien, kafediourien, kereon pe c'hoazh apotikerien a c'halle mont da embannerien. Gwerzhet e veze ar c'hartennoù-post war-dro 3 gweneg an tamm, an holl dud a c'halle prenañ anezho ha krog e oa lod da zastum anezho dija. E 1900 e oa e Frañs eizh milion ha tregont a annezidi, embannet e veze eizh milion a gartennoù-post embannet ha teir c'helaouenn ha tregont a oa evit an dastumerien kartennoù.

En deroù ne c'halle an dud skrivañ nemet war an tu ma oa ar skeudennoù, miret e oa an tu all evit ar chomlec'h hepken. D'ar 1^{añ} a viz Mae 1904 e voe aotreet skrivañ er memes tu hag ar chomlec'h. An tu mat eus ar c'hartoñsoù kenskrivañ-se, 9x14 cm dezho, a oa evit ar skeudennoù penn-da-benn.


Biskoazh ne voe skrivet kement a lizheroù pe a gartennoù-post hag e-pad ar Brezel Bras : 6 pe 7 miliard anezho a voe eskemmet etre ar soudarded hag o zud-nes, bezet tost da 1 000 lizher dre soudard. Embannet e veze ar c'hartennoù-post gant embannerien brevez pe gant aozadurioù ofisiel ha drezo e vez kaset propaganda ha kemennadennoù a garantez. Embannerien a oa o doa kredet embann kartennoù satirek pe enep an arme met adalek 1915 e voent kontrollet.

Da-heul ar Brezel-bed kentañ : an diskar

Etre 1880 ha 1920 e vije bet kaset daou viliard a gartennoù. Krog e oa an diskar war-lerc'h ar Brezel Bras.

Meur a abeg zo d'an diskar-se :

- Gant ar c'hirri-dre-dan e c'halle an douristed pellaat diouzh al lec'hioù darempredet stank ma veze kavet kartennoù-post.



- Gant al luc'hskeudennoù amatour e c'halle an dud mirout eñvorennoù all adal neuze.
- E-lec'h doareoù artizanel da embann kartennoù e teu doareoù industriel : nebeutoc'h a gartennoù a veze embannet er rannvroioù ha ne oant ket ken brav ken.
- Gant diorroadur ar c'hazetennoù skeudennaouet, ar pellgomz, ar skingomz ne oa ket ken pouezus ar c'hartennoù-post war dachenn ar c'helaouiñ.

Ar bloavezhioù 50/60 : donedigezh al liv

Er c'hontrol d'ar bloavezhioù kent e voe degaset muioc'h a galite gant an emdroadur teknikel. Gant an implij ledan eus ar bromidennoù e c'heller sevel kartennoù gwenn ha du bravoc'h. Kinnig a rae al luc'hskeudennerien skeudennoù tapet eus an oabl. Mare ar c'hartennoù lufus ha dantelezet e oa.

Al luc'hskeudennerezh e liv a zeuas war wel adal ar bloavezhioù 50 met ret e voe gortoz kreiz ar bloavezhioù 60 evit kaout tennadennoù mat a-walc'h. En ur gevredigezh hag a oa oc'h emdreiñ buan e taole evezh an embannerien na vefe ket tudennoù ha kirri war ar c'hlichedoù en doare ma ned afe ket re vuan ar c'hartennoù-post e-maez ar c'hiz. An doare nevez-se a oa krog adalek ar bloavezhioù 1930-40 ha kresket kalz goude, ken ne oa ket ken bev ar gwelioù eus ar c'hêrioù hag ar c'hêriadennoù.

War-lerc'h 1970 : an adsav

Albac'henn an dastumerien gant ar c'hartennoù-post en doa roet lañs d'an traoù-se a-nevez. Kalz tud a oa en em lakaet da glask kartennoù-post eus an oadvezh aour. Al levrioù prizañ kentañ a oa deuet er-maez.

Gant an embannerien, broudet hag awenet, e voe graet traoù nevez, kartennoù liesgwelioù, eiladurioù diwar livadurioù pe skritelloù, kartennoù fentus... Aket a gemeront a-nevez gant ar c'hlichedoù hag an doare d'o c'hinnig. Er bloavezhioù 1990 e oa bet krouet furmoù nevez, kinniget kaliteoù paper nevez ha krouet ar c'hartennoù elektronek.

Ar c'hartennoù-post, ganto ur vent 10,5x15 cm ha liv pelloc'h, a zeu da vezañ merkerioù sokial hag a ya eus kaserien da reseverien, hag ar re-se, laouen peogwir ez eus bet soñjet enno, ha pegañ ar c'hartennoù ouzh ar voger, dezho da vezañ gwelet. En deiz hiziv ez eo ar c'hartennoù-post an traoù a vez kavet e gwerzh ar stankañ dre ar bed. Milionoù a skouerennoù a vez produet c'hoazh e Frañs ha kement a brez a vez warno atav. A-dal d'ar binvioù niverel ha d'ar c'hartennoù-post niverel e vez kavet fred d'an « doare paper » c'hoazh.



EÑVORIOÙ EUS BREIZH

Dedennet da vat gant ar rannvro

Harpet war he istor, he yezhoù, he banniel, he hengounioù, puilh enni ar gwiskamantoù hag ar glad, Breizh a sach ar selloù daveti a-gozh. Kerkent ha 1840, gant donedigezh an tren da Naoned, e voe degemeret beajourien a-leizh e Breizh.



Da-neuze e oa un douar awen da vat evit al livourien hag ar skrivagnerien a glaske ur vro all. Oberennoù ar re-se o doa sikouret da grouiñ ur skeudenn romantel, barzhoniel ha speredel eus Breizh.

Er mare-se ivez e teuas war wel ar stereotipoù rannvroel kentañ a oa sañset da rentañ kont eus ur bed gouez ha serret : loustoni, dienez, alkool, boazioù iskis, yezh digomprenus... E-pad tost d'ur c'hantved e oa chomet garant ar c'hlichedoù-se er speredoù.

Gant aodoù Breizh hag ar c'hêrioù kouronkañ diouzh ar c'hiz e voe desachet muioc'h-mui a dud e deroù an 20^{vet} kantved. Stankoc'h-stank e voent a-hed ar bloavezhioù ha treiñ a reas an hentadurezh-se en un touristerezh a-vostad gant ar vakañsoù gopret. E-touez ar vakañsourien e veze kavet ivez an holl Vreizhiz a oa aet kuit da Bariz pe da lec'h all da glask o chañs.

Un dra a bouez evit an embannerien

Ar c'hartoñsoù kenskrivañ bihan-se a reas berzh forzh pegement e Breizh. Bez eo unan eus rannvroioù Frañs ma vez embannet ar muiañ a gartennoù-post ha ma vezont an diseurtañ.

Adal deroù an 20^{vet} kantved e vez graet kartennoù-post hag a daolenn kêrioù bras Breizh gant tiez-embann eus Pariz pe gant an tiez-embann rannvroel. Gant an tiez-embann lec'hel, diouzh o zu, e vez taolennet ar vuhez pemdez war ar maez hag er c'hêriadennoù. Luc'hskeudennerien-embannerien a-leizh a bled gant Breizh. Mont a reont dre an hentoù war droad pe war varc'h-houarn da gentañ ha gant an tren pe gant ar c'harr da c'houde. Tapout a reont miliadoù a luc'hskeudennoù hag a daolenn arvestoù pozet pe tapet war an tomm. Hag anavezet mat eo o anvioù gant an dastumerien : An Doare, Hamonig, Villard, Waron, Laurent, Artaud...

SKEUDENNOÙ EUS DREMM BREIZH

Ur sell ouzh ar skeudennoù

E-pad ouzhpenn kant vloaz e oa bet an embannerien hag al luc'hskeudennerien oc'h ergerzhet Breizh ha luc'hskeudennet o doa ar c'hêrioù hag ar c'hêriadennoù, an aod, ar maezioù... O c'hartennoù-post a oa skeudennoù a sonne, da vareoù disheñvel, ar c'hemmoù bras a c'hoarveze er vro. Diorroadur ar rouedadoù hentoù pe hentoù-houarn, deroù an touristerezh, an obererezhioù ekonomikel ha da c'houde, an divaeziadeg, o deus holl stummet dremm ar vro tamm-ha-tamm..

Gant ar milionoù a gartennoù-post embannet etre 1890 ha 1920 e c'heller, koulskoude, keñveriañ ha sellet ouzh an emdroadurioù souezhus a-wechoù a zo bet er vro e-pad an dekvloaziadoù-se. Gant an tammig kartoñs kenskrivañ-se e c'hall pep hini evel-se teuler ur sell war e giz ha kompren petra eo bet emdroadur e lec'h bevañ eus 1900 betek hiziv.

Al labour-douar

E Breizh, en 20^{vet} kantved, e oa bet fonnusaet amplet al labour-douar, graet muioc'h-mui gant mekanikoù ha cheñchet kalz ar vro gant an adlodennañ. Ar cheñchamantoù e dremm ar vro a weler mat gant gounidigezh plant zo evel an artichaod pe ar c'haol-fleur o vont war-raok. Kemmoù all a zamweler ivez gant an ostilhoù : mekanikoù dre dan a oa deuet war wel er parkeier...

Ar micherioù war en aod

E deroù ar c'hantved tremenet e oa ouzhpenn 50 000 den o vevañ eus ar mor. Ouzhpenn ar besketaerien war vor e oa ivez aochaerien, bezhinaerien, paluderien hag an holl vicherioù all stag ouzh ar mor, evel re ar friturioù. Tamm-ha-tamm ez eas ar pesketa war vicherelaat hag ar porzhioù-mor war arbennikaat : ar sardin e Douarnenez, ar moru e Pempoull, ar grilhed-traezh er Gelveneg... Evel micherioù ar pesketa e teuas ar c'hartennoù-post ivez da vezañ diseurtoc'h-diseurt : diskouez a raent an istrerezh pa oad o kregiñ gantañ pe micher an toun, tennañ a raent implij eus kaerder ar pesked renket kichen-ha-kichen. E-pad pell ivez e voe merket aodoù Breizh gant labour ar vezhinaerien. E-kreiz an 20^{vet} kantved ez emdroas ar bageal-dre-lien ha dont a reas ar bageal evit ar blijadur, gwelet e voe redadegoù-bigi war al luc'hskeudennoù.

An oberrerezh industriel

E Breizh e oa c'hoarvezet ivez an industrielaat hag ar reveulzi deuet da-heul. Al luc'hskeudennerien, oc'h ober o zamm kelaouerien sokial, a yae tre el labouradegoù evit tennañ poltred al labourerien, evel pa vefent war al leurenn evel ma weler gant ar c'hlichedoù a-leizh sevenet e-barzh al labouradegoù. Gant an embannerien e vez lakaet ouzh tu mat o c'hartennoù-post skeudennoù a ziskouez liesseurtes an industriezh d'ar mare-se : ar friturioù en arvor, al labouradegoù gwiadoù, ar chanterioù sevel bagoù pe c'hoazh al labouradegoù tredan...



Sevel a rae al live bevañ war ar maez met war an echu e oa mare ar « 19^{vet} kantved brav », gant ar gwiaderezh war ar maez o vont d'an traoñ ha gant enkadenn ar sardin. Divroet e oa ar Vretoned war-zu ar c'hêrioù bras ha war-zu kêr-benn Frañs. Er c'hartennoù-post ez eus roudoù eus an divaeziadeg-se hag eus an dienez a oa oc'h en em staliañ. Alese eo deuet, evit ul lodenn vat, ar skeudenn fall a voe gant ar vro e-pad pell amzer.

An treuzdougen

P'en em gavas an hent-houarn e Breizh e voe kemmet a-grenn buhez pemdez ar Vretoned, koulz ha dremm ar vro. Naoned eo ar gêr gentañ a voe liammet ouzh Pariz. Da-heul e voe tro ar c'hêrioù bras eus ar C'hornôg, ha goude e voe liammet kêrioù an arvor ouzh re an argoad gant an « tren bihan ». Gant kalz kartennoù-post e voe brudet ar savadurioù a oa ezhomm evit se, evel ar c'harrbontoù hag ar porzhioù-houarn. Ar vuhez er porzhioù, gant al labourioù treuzfurmiñ, gant ar bagoù beajourien pe marc'hadourezh staget ouzh ar c'haeoù, a oa ivez un danvez eus an dibab evit al luc'hskeudennerien.

An touristerezh

E deroù an 19^{vet} kantved e oa un tammig aon gant an dud rak an arvor c'hoazh, met gant galloudoù pareañ ar mor hag e hoal romantel e krogas tamm-ha-tamm an touristerezh kouronkañ da vont war-raok. Diskouez a rae ar c'hartennoù-post e oa lañs gant an touristerezh neuze ha diskouez a raent ivez penaos e oa emdroet giz an dilhad-kouronkañ. Ar pesketa war droad ne veze ket mui diskouezet war ar c'hartennoù-post evel un doare d'en em vagañ hepken met ivez evel un diduamant evit an douristed. Cheñchamant ar selloù taolet ouzh an aodoù a dalvez ivez e oa kemmet an darempred etre gevredigezh hag an arvor.

An eil Brezel-bed

E-pad ar Brezel 1939-1945 e voe embannet nebeutoc'h a gartennoù-post abalamour d'an diaesterioù degaset gant ar brezel. Daoust ma veze nebeutoc'h anezho e voent implijet gant ar pennadurezhioù gall hag alaman da ziskouez luc'hskeudennoù eus ar dismantr graet gant bombezadegoù an enebourien. Brest, Sant-Nazer, an Oriant, Naoned, Sant-Maloù a voe distrujet da vat hag ar c'hartennoù-post, e-ser diskouez an distruj eus ar c'hêrioù, a zeuas da vezañ ur benveg propaganda politikel..

AN DISKOUEZADEG EN DISKOUEZADEG : Ar Mor

E faltazi voutin an dud, neb a ra anv eus Breizh a ra anv eus fasadenn an arvor. An douristed, c'hoant ganto lonkañ ur banne avel ha dedennet gant ar mor hag ar fru, a ziroll war an aodoù gouez.

Heñvel emañ an traoù gant ar c'hartennoù-post hag int ha kaeraat gweledvaoù Breizh. Talvoudekaat a reont al lanneier, ma n'eus den ebet o vevañ, reier benet skoet gant ur mor diroll hed-da-hed dezho. Bastañ a ra ar « skeudennoù kartennoù-post »-se da c'hoant ar vakañsourien a fell dezho rannañ an digêriañ bevet e « penn pellañ ar bed » War an aodoù, ar porzhioù hag ivez war an traezhennoù, ar c'hazinoioù hag al lec'hioù touristel all e vez lakaet ar pouez gant an embannerien. Evel-se e kavas ar c'hêrioù kouronkañ kentañ, a voe lakaet da vezañ anavezet gant ar veajourien, ur skor brudañ eus ar c'hentañ gant ar c'hartennoù-post.

ATALIER AL LUC'HSKEUDENNER ARZ ER POLTREDOÙ

Arz ar poltredoù zo en orin ar remziad kentañ a luc'hskeudennerien a vicher. Adalek ar bloavezhioù 1880 e oa aet al luc'hskeudennerezh kalz war-raok : e 1865 e oa 80 luc'hskeudenner a vicher e Breizh, staliet er c'hêrioù bras : met stalioù bihan, dister-kenañ alies, a voe digoret ivez tamm-ha-tamm er bourc'hioù ha war ar maez.



A-raok ma erruas ar binvioù luc'hskeudenniñ er familhoù ez ae an dud da stalioù al luc'hskeudennerien, pa ne zeue ket ar re-se daveto gant o stalioù-red. En un nebeud eurvezhioù e veze tennet ganto luc'hskeudennoù kaer ha spis war baper a oa rakvoullet war an tu all anezhañ an tu-gin eus kartennoù-post. Evit ar vignoned hag ar familhoù e vezent graet dreist-holl ha ne veze embannet nemet un nebeud skouerennoù anezho.

Tennañ poltred an dud evito o-unan...

Evit derc'hel roudoù eus ur mare a bouez eus ar vuhez pe evit diskouez ur renk sokial, e teue al luc'hdkeudenner da staliañ e venveg dirak tud a vez evel leurennet gantañ, en ur c'hinkladur touellus. Evit bezañ poltredet e wiske an dud o dilhad kaerañ, ne vousec'hoarzent ket, chom a raent difrom bepred. Dav e oa ivez diskouez traoù arouezel : ur groaz evit ar feiz, ul levr evit ar sevenadur, ur pezh arrebeuri kizellet evit diskouez ar berzh er gevredigezh... Ar gwiskamant hag ar c'hoef hengounel a oa arouezioù ret-holl evit diskouez e oant gwiziennet en ur gumuniezh.

... pe evit ar re all

Diwar an doare kentañ-se d'ober poltredoù e oa deuet e-leizh a zastumadoù war ar « patromoù » rannvroel. E deroù an 20^{vet} kantved e veze kavet alies er stalioù poltredoù « henvroiz », e-kichen kartennoù-post a daolenne lec'hioù dibar.

Gant an embannerien vras eus Frañs e veze kaset o luc'hskeudennerien dezho da foetañ bro e Breizh. An annezidi, souezhet ha stad enno o welet e plijent d'ar « Barizianed »-se, ganto pezhioù melloù binvioù-luc'hskeudenniñ, a leze anezho da dennañ o foltred, gant o gwiskamantoù hengounel, lorc'h enno o vezañ diskouezet war miliadoù a gartennoù-post.

Daoust ma oa bet aozet ar poltredoù-se en un doare giz kozh, e roont dimp, a-dreuz an amzer, testenioù diwar-benn buhez an dud dister, na vezent ket taolennet nemeur gant al livourien. Gant ar c'hartennoù-luc'hskeudennoù e c'halle pep hini lakaat tennañ e boltred evit un nebeud gwenneien tra ma oa miret ar poltredañ betek neuze evit an dud uhel hepken.



LUC'HSKEUDENNIÑ HAG EILSKEUDENNIÑ : KARTENNOÙ A-RUMMADOÙ

Al luc'hs keudenneresh

Liammet strizh eo ar c'hartennoù-post ouzh al luc'hskeudennerezh hag an emdroadurioù teknikel o deus levezonet kalz an embann anezho. E deroù ar bloavezhioù 1900 e oa ezhomm ugent munut evit tapout ur skeudenn gwenn ha du. Er bloavezhioù 1900 e ranke al luc'hskeudenner gouzout diouzh ar gimiezh, an optik, ar mekanik, hag ouzhpenn se e ranke kaout daoulagad ul livour.



Moullañ ar c'hartennoù-post

An teknikoù implijet evit eiladuriñ ar skeudennoù o deus levezonet gwerzh ar c'hartennoù-post ivez. Eus un nebeud skouerennoù d'un eiladuriñ a-vras, emdroadur an teknikoù en doa roet an tu d'an holl dud da brenañ ar c'hartoñsoù bihan moulllet-se. War-lerc'h an tennañ skeudennoù emañ ar moullañ. Bromokolor, heliotipiezh, lizherennerezh, luc'hengraverezh, luc'hkromiezh, neobromur, mexichrome, dour-kreñv... Liesseurt eo an teknikoù moullañ ha moullerien zo, ouzhpenn, o deus un doare ober dezho hag a viront en un doare gwarizius. Met lod anezho, en o zouez, a sav dreist ar re all hag a verk istor ar c'hartennoù-post.

E dibenn an 19^{vet} kantved e voe strishaet implij ar maendreserezh da dachenn an embannadurioù Arz

Ne c'halled ket lakaat an teknik-se da dalvezout evit al luc'hdkeudennerezh. Implijet e veze kalz gant an embannerien evit ar c'hartennoù-post skeudennieren hag ar faltaziennnoù.

Adalek ar bloavezhioù 1900, fototipiezh ha kartenn-luc'hskeudenn

Ar fototipiezh zo un doare moullañ hag a roas lañs da c'hiz ar c'hartennoù-post e deroù an 20^{vet} kantved, met dilezet e voe daoust ma oa fin ha naet ar c'hreunenn. Re ger e oa : ret e oa kaout implijidi niverus ha barrek, ha hir e oa an amzer seveniñ. Al luc'hskeudenn-gartenn zo ul luc'hskeudenn lakaet ouzh tu-gin kartennoù-post hag a c'halle bezañ prenet hag implijet gant pep luc'hskeudenner, amateur pe den a vicher, met buan ez eas ar produerezh artisanel-se diwar wel.

War-lerc'h ar Brezel Bras e voe kemeret lec'h ar fototipiezh gant an heolengravañ

Dister e voe an disoc'h avat rak kavet e veze gwelloc'h ober tennadennoù a-vras eget moulladennoù arzel : amzer ar c'hartennoù gell-du e voe pe ar c'hartennoù livet e glas, gwer, glaz-ruz...

Er bloavezhioù 1950 e oa bet oadvezh aour ar vromidenn

Aet eo an teknik-se da netra pa oa deuet an offset e deroù an dekvloaziad a oa bet war-lerc'h. Evit an doare ober-se ez eus ezhomm da gaout dafar micherel ha micheriourien varrek d'ober war e dro. Produet e veze e greantioù met daoust da se e oa skeudennoù eus ar c'hentañ.

Er bloavezhioù 1960-70 e oa en em ledet an offset

War-dro 1910 e teuas ar gwaskerelloù kentañ met ret e voe gortoz ar bloavezhioù 30 evit ma krogfe an implij d'en em ledañ. En deiz hiziv ez eo an doare ober implijet ar muiañ : tennadennoù a-zoare, moulet a-vras, en ur priz izel :

En 21^{vet} kantved eo deuet ar moullañ niverel

Dre m'eo soupl a-walc'h an teknik-se ha ma vez labouret buan gantañ e c'haller kaout kalz a batromoù gant kementadoù bihan ha mirout prizioù dereat. Ne c'haller ket c'hoazh keñveriañ an doare ober-se gant an offset avat evit ober tennadennoù a-vras ha moulladurioù war baper kartoñset.

Eus ar gwenn ha du d'al liv

E deroù an 20^{vet} kantved e veze degadoù a vicherourien, ur barr-livañ pe ur broust ganto en o dorn, o lakaat liv, a-hed an devezh, war meur a gant kartenn-bost moulet e gwenn ha du. Aesaet e voe al labour war-lerc'h war-bouez moullou-livañ hag e-se e c'halle al livadurourien labourat buanoc'h. Ret e oa bet gortoz ar bloavezhioù 1960 evit ma vije gwelet kartennoù-post a-zoare, moulet e pevar liv.

AN DISKOUEZADEG EN DISKOUEZADEG : Ar Mor

Bleiz-mor, Paotr-mat, Mous hag e vestrouer, Paotred an Island ha Tud a vor... stank eo ar poltredoù a daolenn pesketaerien o lakaat tennañ o foltred, lorc'h enno, evit an dud a zeuio war o lerc'h pe luc'hskeudennet war an tomm pa vezent o ren o buhez pemdez. Ar vartoloded vreizhat-se, skarinet o dremmoù ha kaledennet o daouarnoù abalamour d'ur vuhez rust zo patromoù a-feson evit al luc'kskeudennerien a veze o klask « klippennoù » gwirion.

Aet pell ouzhpenn an hanter eus ar bloaz, da sardineta, da douneta pe da vorueta, e personelae an dud-se ar vuhez rust war vor ma tennent dioutañ o bevañs ha hini o ziegezh gant nerzh-kalon.

Taolennet e vezent alies gant kevell pe linennoù ganto en o daouarn, o prientiñ ur gaoteriad, pe ur c'horn-butun ganto en o genoù ha netra ken. Kavout a reer anezho c'hoazh gant un treuziad medalinier evit ar saveteadennoù graet ganto. Kemeromp skouer Reun Aotred (René Autret), patrom an *Amiral Roze*, aet d'ar mor 141 gwech ouzh barrenn-stur ur c'hanod a-boan ouzhpenn 10 metr dezhañ, a savetaas buhez 233 a dud hag a voe savet da rez marc'heg ar strollad a Enor e 1891.

DES IMAGES A DECODER

SKEUDENNOÙ DA GOMPREN

A-hed an 20^{vet} kantved ez ae an embannerien diouzh goulenn o fratikoù ha diouzh emdroadurioù ar gevredigezh. Da bep mare e oa ur stil pe un doare disheñvel neuze, ar pezh a lakae emdreiñ ar skeudenn eus Breizh a veze diskouezet gant an tammoù kartoñs bihan-se hag a veaje.

A-raok ar Brezel Bras

Da vare o oadvezh aour (1900-1920) e oa ar c'hartennoù-post unan eus ar mediaoù a veze implijet ar muiañ evit kas keleier hag evit skignañ traoù. Tennet e veze poltredoù eus an disterañ bourc'h gant al luc'hskeudennerien. Temoù zo a zeue ingal : an iliz, an ti-kêr hag ar skol.

Tennet e veze poltredoù an annezidi war ar straed, gant o gwiskamantoù giz ar vro kentoc'h. Ar sell a daoler war Breizh zo unan taolet war ur vro bell ha kaer-kurius. Er memes mod eo ar micherioù hengounel a veze diskouezet ; ar re graet gant micherourien pe implijidi a veze poltredet ivez met nebeutoch.

Etre an daou vrezel

War-lerc'h ar Brezel-bed kentañ e oa bet Breizh o cheñch : dilezet e voe ar gwiskamantoù hengounel gant ar baotred, kirri-dre-dan a gemeras tamm-ha-tamm lec'h ar c'hirri gant kezeg... Ar skeudenn vodern-se eus ar vro ne veze ket lakaet war wel... Ar pezh a ziskouezed dreist-holl eo ar c'heuz d'ur gevredigezh vreizhat a oa o vont da get. Klichedoù kozh a veze adimplijet gant an embannerien. Adkavet e veze kodoù ar « Vreizh arallvro » neuze. ». Goude e reas an embannerien gant luc'hskeudennoù « diamzer ». Mont a reas an arvestoù bev diwar wel ha kemeret e voe o lec'h gant gwelioù meur. Tamm-ha-tamm e kollas ar c'hartennoù-post o zammig ene.

An 30 vloaz gloriüs

Adalek ar bloavezhioù 50 e tegemeras Breizh e oa ur vro vodern anezhi, en em dreiñ a reas da vat war-zu an amzer-da-zont ha dilezel a reas ar skeudenn anezhi ma veze taolennet evel ur vro rust hag enket warni hec'h-unan. Gant an embannerien e voe aloubet an oabl d'ober gwelioù a-zioc'h eus ar monumantoù, ar c'hêrioù hag an aodoù. Dont a reas an terkadurioù nevez er c'hêrioù, ar savadurioù modern hag an aveadurioù bras da vezañ temoù evit rummadoù nevez ar c'hgartennoù-post. Gant ar skeudennoù liesgwel niverusoc'h-niverus e voe roet ul lañs nevez d'ar c'hartennoù, anezho binvioù brudañ evit an touristerezh.

Tostoc'h dimp

Er bloavezhioù 80 e veze roet muioc'h a bouez d'an arz pa veze graet luc'hskeudennoù. Gant an emdroadurioù teknologel e c'helle an embannerien adneveziñ o spered-krouiñ ha klask a raent krouiñ traoù nevez. Gant ar c'hartennoù-post e vez roet ur skeudenn diwirion eus Breizh a-wechoù ha brudet e veze ar gwelioù gant savadurioù pe ar re naturel.

Echu da vat e oa mare ar skeudennoù folklorel ha Breizh en em ziskoueze en amzer vremañ.

Gant diorroadur an touristerezh a-vordilh ne veze taolennet gant ar c'hartennoù-post nemet kêrioù touristel ha diaes e oa kavout ur gwel eus hor « c'hornig » a Vreizh er stalioù, evel gwechall.

Er bloavezhioù 2000 e teuas an enkadenn ekonomikel tamm-ha-tamm ha klask a reas an dud distreiñ d'o gwrizioù. Gant ar gouelioù hengounel e vez kaset war-raok, ouzhpenn ma roont plijadur d'an dud er vro, un hêrezh adpiaouet, ur vreizhadelezh lorc'hus ha sammet.

VERSO

AR VUHEZ PREVEZ EN TU-GIN

Kerkent ha ma voe krouet e voe implijet ar c'hartennoù-post evit kas keloù. Evel ar pellgomz, ar Genrouedad pe ar rouedadoù sokial en deiz hiziv e oa ar c'hartennoù-post un doare prim, marc'had-mat, aes da implijout hag efedus evit kenskrivañ pa veze pell an dud ha dispartiet an eil re diouzh ar re all. Ar pezh a veze skrivet evel-se ne oa ket traoù diwar-c'horre, pell alese. Pa lenner anezho e kaver ivez buhez pemdeziek, ha prevez a-wechoù, familhoù Frañs.

Eñvorennoù bihan eus Breizh

E-mesk ar c'hartennoù kenskrivañ kaset an aliesañ e kaver traoù evel « bonjour » pe « bon souvenir de... », pa vez an dud o skrivañ d'o c'herent pe d'o mignoned. Kalz a gartennoù-post gant kemennoù a vez skrivet e-pad an hañv. Gant ar c'hartennoù-post e c'hall an den evel-se kontañ e veajoù : war an tu gin, un nebeud gerioù, ha war an tu mat, ur gwel eus al lec'h vakañsiñ. Ar yec'hed, liv an amzer d'ar mare ma skriver, kaerder al lec'hioù... eo an temoù a blijer ar muiañ d'an dud neuze pa skrivent.

Priz ar gerioù

Er bloavezhioù 1900 e c'halle reolennoù ha politikerezh prizioù ar Post seblantout bezañ souezhus : geriennoù sevended evel « Amitiés », « Amicale poignée de main » ha « Bien à vous » a veze degemeret tra ma veze lakaet taosoù war geriennoù all evel « Ça va bien », « Revenez vite » pe « Charmante journée ». Evit ar c'hartennoù kenskrivañ a oa enno 5 ger pe nebeutoc'h e oa distaolioù war briz an timbr ivez. Rankout a rae tud ar post bezañ war evezh eta ha sellet mat hag-eñ e veze doujet d'ar reolennoù.

Pa studier ar c'hartennoù kenskrivañ-se a-wechall e kaver ivez frazennoù dibar, ar skritur gant ar bluenn, troioù-lavar hag ul lavar a ziskouez pegen reoliet e oa an darempredoù hag an eskemmoù etre an dud en amzer-se.

Ar c'hartennoù da ober pep tra

Ar genwerzherien hag an artizaned a oa en em lakaet buan-kenañ da ober gant ar c'hartennoù-post evit o bruderezh met ivez evel fakturennoù, notennoù, paperennoù urzhiadiñ...

Meur a wech e veze savet hag ingalet al lizheroù bemdez : div wech d'an nebeutañ, teir gwech zoken e kumunioù zo. Talvezout a rae ar c'hartennoù-post eta da lakaat emgav pe da nullañ an emgav ha gallout a raed lenn warno « Dont a rin warc'hoazh da 11 eur... ».

« Eus an talbenn e skrivan dit... »

E-pad ar Brezel-bed kentañ o doa c'hoariet al lizheroù ur roll a-bouez bras.

Ar soudarded a implije o mareoù diskuizh evit lakaat tennañ o foltred ha kas kartennoù-post d'o zud-nes ; al luc'hskeudennerien a oa war an talbenn a oa, a-hend-all, e-mesk ar genwerzherien a rae ar muiañ a verzh en amzer-se. Pa oant diskarget a dimbrañ e oa ar c'hartennoù-post neuze un doare digoust, eeun ha deuet-mat d'ar soudarded evit reiñ keleier eus an talbenn. Kontrollet e veze al lizheroù ha n'o doa ket gwir ar soudarded da reiñ titouroù war al lec'h resis ma oant, an niver a dud bet lazhet, an argadegoù da zont pe imor ar bagadoù-arme. Ret e oa dezho ivez skrivañ e galleg ha neket en o yezh-vamm abalamour da c'hallout kontrollañ anezho.

Kartennoù breizhat met e galleg

E-mesk ar milionoù a gartennoù-post a voe kaset e Breizh e oa un nebeud a oa o enskrivadurioù e brezhoneg pe e gallaoueg. Evit ar pezh a veze skrivet war an tu-gin, ral e oa gwelet kartennoù-post skrivet e yezh-vamm ar Vretoned ivez. Gant lezennoù-skol Jules Ferry e 1881-1882 e voe difennet groñs, sañset, ober gant ar brezhoneg er skolioù hag e 1902 e voe klasket berzañ, gant poan avat, an implij eus ar brezhoneg gant ar c'hloer. Abegoù all o doa bet levezon war ar yezh ivez, evel an hent-houarn o vont war-raok, ar vro oc'h en em zigeriñ d'an douristed, meskaj an dud e-pad ar Brezel Bras... Daoust ma oa c'hoazh ar brezhoneg yezh ar familh, ar gêriadenn hag ar vuhez relijiel, e deroù an 20^{vet} kantved, e oa muioc'h-mui a Vretoned o c'houzout an div yezh hag oc'h ober gant ar galleg kenetrezo.



LE COSTUME BRETON SOUS TOUTES LES COUTURES

AR GWISKAMANTO Û BREIZHEK A BEP TU

Dibar e oa ar gwiskamantoù breizhek dre ma oant diseurt-kenañ. E deroù an 18^{vet} kantved e paotaas ar stummoù lec'hel eus ar gwiskamantoù pobl breizhek, met adalek an Dispac'h gall eo dreist-holl e voe lakaet an diseurtes-se war wel. E-kreiz an 19^{vet} kantved e savas al livour François-Hippolyte Lalaisse (1810–1884) ur renabl klok anezho. War-lerc'h e krogas an embannerien kartennoù-post da implijout an tem-se ; gant an dilhad breizhek livet warno e veze kavet sav d'o c'hartennoù. Lañs a voe roet da rummadoù tematek a reas berzh bras : Joseph Villard (1838-1898) ha, war e lerc'h, Emile Hamonig (1861-1943) o doa embannet, etre 1900 ha 1930, dastumadoù diwar-benn « Koefoù Breizh » pe « Gwiskamantoù Breizh ».

Aliezik e weler traoù digempoell war ar c'hartennoù-post. Kollet e vez an embannerien gant liesseurtes ar gwiskamantoù, ha ne glot ket atav an enskrivadurioù lakaet war ar c'hartennoù-post gant gwiskamant an dud el lec'h meneget.

Breizh gwisket en he c'haerañ

Gant ar c'hoefoù pe an dilhad gouel e plede al luc'hskeudennerien dreist-holl. Lakaat a raent an dud poltredet ganto a-wechoù da wiskañ anezho e degouezhioù eus ar vuhez pemdeziek ma ne zereent ket...

Kalz muioc'h a boltredoù merc'hed a oa eget a boltredoù paotred : gant doareoù lies ar gwiskamantoù merc'hed e voe broudet al luc'hskeudennerien da zerc'hel roudoù eus an holl zibarderioù-se...

AN DISKOUENZADEG EN DISKOUENZADEG : Ar Mor

Arabat eo d'ar martolodennoù brudet bet ledet e-touez ar bobl gant Coco Chanel ha gant Jean-Paul Gaultier da c'houde, bezañ e gouloù an dilhad-labour a bep seurt gwisket gant martoloded Breizh.

Rankout a ra an dilhad-labour, a zo gwiskamantoù akomod da gentañ ha graet evit padout par ma c'haller, bezañ evit ar barroù-amzer hag an holl vernioù-mor tapet gant ar besketarien, koulz hag evit an uz gant ar vuhez pemdez.

Heñvel eo al livioù ouzh re o bagoù : okr evel ar gouelioù kivijet gant ur meskaj bloneg, dour-mor ha rusk pin ; pe glas evel rouedoù ar bagoù-sardineta, a vez lakaet en ur soub sulfat houarn.

Pa veze gwallamzer e pade ar bleizi-mor ouzh pep tra gant o bragoù, o vareuzenn hag o zog e toal koaret.


Gant ur bered en o fenn e vez taolennet an dud a vor alies ; pesketaerien Bro-Leon, e norzh Penn-ar-Bed, a wiske bonedoù iskis hag a veze graet « kalabousennoù » anezho

Ne oa ket ken stank ar c'hartennoù-post eus Breizh-Uhel. War dreuzoù an 20^{vet} kantved e oa bet dilezet abred ar gwiskamantoù hengounel war ar maez eno ha gwisket dilhad eus ar c'hêrioù kentoc'h. Abalamour da se, sur a-walc'h, e voe lezet Breizh-Uhel a-gostez. Neuze e voe roet kalz a bouez d'ar skeudennoù eus Breizh-Izel hag ivez Bro Gwenrann, bro ar baluderien, ar vro nemeti eus Breizh-Uhel ma voe kendalc'het da wiskañ an dilhad hengounel diwezhat a-walc'h.

Ur glad sevenadurel

Kregiñ a reas ar gwiskamantoù hengounel da vont diwar wel e Breizh adalek deroù an 20^{vet} kantved, abalamour ma oa giz Pariz o tapout brud hag an dilhad prest da wiskañ oc'h ober berzh, abalamour ma oa ezhomm d'en em ober diouzh an doareoù labour nevez ha diouzh an doareoù treuzdouden nevez, met ivez abalamour d'ar brezelioù o doa eilpennet buhez pemdeziek an dud. Dalc'het e oa bet da werzhañ kartennoù-post a daolenne Bretoned en o gwiskamantoù hengounel, koulskoude, ha ganto e voe kendalc'het da skignañ ar skeudenn eus dibarded ar vro e-pad pell.

En deiz hiziv ez a ar c'hartennoù-se d'ober testenioù prizius : ganto e c'haller studiañ ar gizioù hervez ar broioù, ar c'helc'hioù keltiek a c'hall lakaat ober gwiskamantoù heñvel ouzh ar re gozh hag ar grouerien a vremañ a dap krog enno evit adkrouiñ an tresoù kozh.



ETRE REALOURIEZH HA FLEMMSKEUDENNOÙ

Ar c'hartennoù-post : testoù eus ur mare...

Etre 1890 ha 1920 e c'haller keñveriañ ar pezh a veze graet gant an embannerien rannvroel ha broadel ouzh kelaoua dre luc'hskeudennoù.

Dre ma ne oa ket mediaoù all e talvez ar c'hartennoù-post da zerc'hel ur roud eus kalz darvoudoù : peñseoù, gwallzarvoudoù, abadennoù relijiel pe bolitikel... Diskouez a raent ivez savadurioù ar c'hêrioù hag ar c'hêriadennoù, an oberezhioù ekonomikel hag ur bern munudoù eus ar vuhez pemdez. Diskouezet e veze ganto ar pezh a choarveze e gwirionez e Breizh, traoù tonket da cheñch, da vont da get zoken

Talvoudus eo ar skeudennoù-se dre ma titouront ha ma lec'hiont an tem gant un alc'hwez. Gant ar perzh dibar-se e-keñver al luc'hskeudennoù kozh all e c'haller klokaat ar mammannoù istorel klasel.

... flemmskeudennoù ur gevredigezh diwar ar maez

Mat e veze gwerzhet danvez Breizh, ur vro bell ha kaer-kurius, ha kenderc'hel a raed evel-se gant ar sell romantel eus an 19^{vet} kantved. Gant al luc'hskeudennerien e veze kreñvaet ha gwashaet perzhioù ur vro digustum, sonnet en amzer ; a-wechoù e oant techet d'ober goap, d'ober fae ha da gavout abeg. Taolennet e veze ar Vretoned evel tud kleuk, gouez, lous hag evel mezvierien. Graet e veze goap outo abalamour d'o dienez, d'o yezh ha peogwir e oant tud diwar ar maez. Evel-se e veze maget klichedoù difeson diwar-benn ar Vretoned.



AN DISKOUENZADEG EN DISKOUENZADEG : Ar Mor

Ur bed a vor diaes e-lec'h ma ranker bezañ kalonek hag uvel a vez diskouezet gant ar c'hartennoù-post. Gant an embannerien e veze c'hwezhet an traoù hag e veze lakaet tudennoù zo war wel evel ar gwragez nec'het o c'hortoz distro o gwaz, ar vartoloded arroutet pe ar voused ken yaouank.

Gant an diouer a zielloù da brouiñ e voe anezho e pado pell mojenn ar beñseerien, an dud spontus-se a rae skrap war ar bagoù distaolet en aod.

Gant ar c'hartennoù-post e veze roet da welet dienez an dud a vor ivez : etre enkadennoù ar sardineta, ar familhoù bras hag an intañvezed a ranke sammañ o-unan ar garg eus o ziegezh, e veze alies ar baourentez o ren da vat. Ha pa vefe Breizh ur vro sko ouzh ar mor e veve an darn vrasañ eus ar familhoù war ar maez hep bezañ gwelet ar mor gwech ebet.


Dre ma oa deuet ar c'hartennoù-post da vezañ madoù beveziñ pemdeziek e oant ur vammenn vat a arc'hant evit an embannerien. Klask a rejont tennañ gounid eus ar stereotipoù-se hag embann e-leizh a rummadoù kartennoù ma veze graet un depegn reuzeudik eus an dud alies.

Skeudennaouet e oa ar c'hartennoù-post-se gant doareoù a bep seurt : eilaozet e veze al luc'hskeudennoù, leurennet arvestoù lu pe difeson a-wechoù e kinkladurioù naturel pe artifisiel, lakaat enskrivadurioù faltazius, implijout bugale « skouer » pe tud kaer-kurius ha souezhus. Rak al luc'hskeudennerien-embannerien, en amzer-se, o doa o c'hinkladurioù dezho, o fatromoù hag o gwiskamantoù prenet pe graet ganto. Tud-nes, implijidi pe c'hoazh tud e oant en em gavet ganto e c'halle bezañ ar patromoù-se.

Ret eo studiañ gant aket an arvestoù luc'hskeudennet niverus evit gwelet petra e oa ar gevredigezh vreizhat e gwirionez, pell diouzh ar falstaolenn a veze graet anezhi.



3M AR BLOAVEZHIOÙ 1900




Ar stereoskopiezh a erruas e-kreiz an 19^{vet} kantved. Gwelet e oa evel un dispac'h e bed al luc'hskeudennerezh. Ar skeudenn, taolennet div wech, a vez lennet gant ur stereoskop. An div skeudenn unanet a lakae da grediñ ez eo bosek ha torgennek an taolennadur ha kinnig a raent ur gwel e teir ment, prim ha peuzvev. An deknologiezh-se, a ro da welet ar bed en un doare disheñvel, a reas berzh bras. Stagañ a reas an embannerien kartennoù-post d'ober ganti ha dont a reas ar c'hartennoù stereoskopek da vezañ ur gwir doare kehentiñ touristel. Ganti e c'halle an implijerien gwelet gweledvaoù a-vos pe damwelet fiñv ha lusk an arvestoù bev er straedoù.

AN ANKOÙ (stignad Kinect)

Gant an Ankoù, mevel ar marv, e vez sammet eneoù an dud aet da Anaon nevez zo en e garrigell wigourus.

Ma klevit chourig e garrigell pe ma welit paotr e falc'h, emaoch-c'hwil ivez en arvar da vont d'ar bed all !





RELIJION, FEIZ, KREDENNOÙ HA BRIZHKREDENNOÙ

Feiz ar Vretoned

Er bloavezhioù 1900 e oa ar Vretoned tud a feiz, tud a iliz ha sentus ouzh ar veleien : berzh bras a rae ar misionoù, ar pardonioù hag ar pirc'hirindedoù bep taol. O buhez pemdez, o buhez sokial met ivez al lidoù tremen a veze renet gant ar relijion gatolik. Ar pedennoù hag an oferennoù a luske ar sizhun, gouelioù relijiel a veze a-hed ar bloaz hag al lidoù relijiel a verke an tennadoù eus ar vuhez. Gant pouez ar relijion e oa bet merket don dremm ar vro ivez peogwir ez eus bet renablet miliadoù a chapelioù, a groazioù hag a ilizoù e Breizh. Hogen, war kredennoù ha war boazioù an amzer gozh eo diazezet feiz ar Vretoned ivez.

Eus ar mojennoù d'ar c'hredennoù

Azeulerezh ar sent pareer, ar feunteunioù, ar gwez, ar mein a gennev gant ar gristeniezh vreizhat. Nag ar veleien, na skolaerien ar Republik n'int deuet a-benn da zistroadañ anezho.

P'o deveze diaezamantoù yec'hed, an dud diwar ar maez e Breizh n'aent ket da gavout ar medisin met ober a raent gant plant o doa vertuzioù pareañ ha mont a raent ivez da gavout paotred pe merc'hed a vez anvet sorserien, kouracherien, dreserien ha diskonterien.

Souezhus eo gwelet an hollad bras-se a henvoazioù relijiel ma veze mesket ar gristeniezh ha kredennoù an amzer gozh.

Gant ar c'hantadoù a bardonioù e veze dedennet e-leizh a dud, beajourien, skrivagnerien, livourien ha luc'hskeudennerien. Klask a raent tapout ha lakaat war baper pe war lien devosion ar Vretoned hag an nerzh a zeue eus ar bodadegoù bourrus-se.

AN DISKOUZADEG EN DISKOUZADEG : Ar Mor

N'eo ket diwar skañv e lavarer « Evit gouzout pediñ ez eo ret bezañ bet martolod ».

Adal d'ur mor divent ha tempestus e veze klasket doareoù da sachañ grasoù mat Doue.

En em dreiñ a rae an ekipajoù en arvar d'ober peñse ha da veuziñ war-zu ar pediñ en ur ober ur gouestl.

E-se e rankent seveniñ o fromesa ma'z adwelent an douar. Gallout a rae an ex-votoioù bezañ livadurioù, plakennoù engravet pe maketennoù bagoù a veze douget er brosesion bep bloaz gant ar vartoloded hag a veze profet evit trugarekaat ar Werc'hez.

Pa vezent moret e veze badezet pep bag nevez e-pad ul lid relijiel ma c'halle ar vartoloded lakaat Doue e-bourzh ganto. Bep bloaz, a-raok deroù ar c'houlzad pesketa, e veze benniget al listri hag ar barkoù kinklet gant ar person, evit gwareziñ ar baotred a oa o vont kuit war vor e-pad mizvezhioù hir.

E Breizh ez eus sinadoù a-leizh o reiñ da c'houzout emañ an dud e par ar marv. Evit gwrazezh martoloded bro Ploueg-ar-Mor hag a chome pell hep keloù e veze enaouet ur c'houlouenn-goar e-kichen delwenn Sant-Loup hag a ziskoueze penaos e oa kont gant o gwaz diank : ma oa ar flammenn o teviñ sklaer hag eeun e oa mat an traoù gant ar gwaz ; met diwall a ranked ma oa o vrañsigellat pe o vougañ a-daol trumm. Marvet e oa ar martolod, a-dra-sur.

Chom a rae ar c'houn eus ar gwaz neuze, merket er vered gant ur blakenn staget ouzh moger an dud aet da goll er mor e Plaeranez pe gant ar Broella en Eusa, ma veze beilhet ur groaz koar vihan ha douaret zoken e-lec'h ar c'horf kollet da viken.

SONOMP, KANOMP, DAÑSOMP

War ar c'hartennoù-post e veze diskouezet ar sonerezh, an dañs hag ar c'han hengounel alies evel folkloraj. E deroù ar bloavezhioù 1900 e voe aozet ar gouelioù breizhek kentañ, ar c'henstrivadegoù sonerien, dañsoù ha gwiskamantoù ha plijout a raent kenañ d'an dud.

Sachañ a rae ar gouelioù-se evezh al luc'hskeudennerien ha ganto e voe diskouezet ur skeudenn eus ar sonerezh hag eus an dañs evel traoù evit ar vegenn tra ma oant boazioù pobl gwriennet e Breizh a-bell-gozh da gentañ.

Evel ma oa bet evit ar gwiskamantoù, ne veze ket taolennet kalz Breizh-Uhel war ar c'hartennoù-post rak ne oa ket ken « livus ».



Kan ha kanaouennoù

Kanet e veze e kement degouezh zo eus ar vuhez pemdeziek. Kanet e veze pa veze dañset, pa veze labourer, er beilhadegoù, er parkeier, war ar bagoù, er friturioù... Ne weler ket kalz a roudoù eus an dra-se war ar c'hartennoù-post ; ne gaver warno nemet un nebeud kanerezed gwerzioù hag un nebeud barzhed vreizhat.

Oberenn ar saver-kanaouennoù Théodore Botrel, avañ, a voe skignet kalz, hag ar c'hartennoù gant e ganaouennoù hag e varzhonegoù graet gant an embanner Emile Hamonig o doa brudet anezho un tamm mat. Meur a gant mil kartenn-bost a voe gwerzhet warno skeudennoù eus an arzour gwisket gant gwiskamantoù diseurt, ha brud a voe degaset dezhañ gant ar c'hartennoù ma veze embannet e ganaouennoù, ur poz war bep hini.

AN DISKOUZADEG EN DISKOUZADEG : Ar Mor

Gant kanaouennoù ar vartoloded e vez danevellet mesk-ha-mesk an tonkad an dud a vor, kened ar merc'hed ha nerzh-kalon ar vartoloded. Talvezout a rae ar c'han ivez da luskañ al lodennoù labour o tistreiñ ingal, evit adreiñ kalon d'ar vartoloded o doa poanioù kalon pe startijenn d'ar re aet o nerzh diganto. Evel ma veze graet gant an dañs evit diskuizhañ ar micherourezed goude m'oa doa tremenet eurvezhioù hir war o fost labour.

Ur vammenn awen dihesk evit kantadoù a saverien komzoù hag a ganerien eo ar mor. E-touez ar re vrudedañ emañ : Théodore Botrel hag e « bPaimpolaise » brudet ; ar ganerez Fréhel, Marguerite Boulc'h hec'h anv gwir, a gemeras anv ar C'hab ; pe Suzy Solidor, Suzanne Rocher, adanvet evel tour Sant-Maloù, a gane ar mor ha merc'hed Sant-Maloù...

Gallout a rae ar Vretoned kaout komzoù kanaouennoù Botrel e stumm kartennoù-post, ur poz war bep hini anezho. Kement-se a yae d'ober un toullad mat anezho : 6 evit « *La Paimpolaise* », 6 evit « *Le Tricot de laine* » hag 8 zoken evit « *les Deux gabiers* ».

Ar sonerien

Tra ma veze kanet ha dañset gant an holl dud ez eo gant ar baotred e veze sonet. War ar c'hartennoù-post e weler alies-mat koubladoù binioù ha bombard, diwar-goust ar binvioù all evel ar violoñs, an akordeoñs, ar viell, ar glarinetenn, ar pif, an daboulin, ar veuz.

Ar sonerien binioù ha bombard pintet war donelloù a oa ur skeudenn klasel ha gwirion eus ar vro met dont a reas buan an danvez-se da vezañ ur stereotip eus sonerezh Breizh. Daoust da se e tiskouez mat ar c'hartennoù-post pegen alies e veze sonet gant ar sonerien-se e deroù an 20^{vet} kantved : kemer e raent perzh e kement fest relijiel pe disakr a oa. Kavet e vezent ivez en holl rejimantoù soudarded evit reiñ startijenn d'ar bagadoù-arme e-pad ar Brezel Bras pe e bourzh ar bagoù-pesketa e-kichen ar sonerien akordeoñs.

An dañs

Ne c'haller ket dispartiañ an dañs diouzh ar c'han na diouzh ar sonerezh. Ur plas a bouez en deus e buhez pemdez an dud diwar ar maez. An holl sonioù ha tonioù a vroude an dud da zañsal en amzer-se. Abalamour da se e kaver, evel ar sonerien binioù ha bombard, ar seurtoù dañs pennañ war kalz kartennoù-post, met alies e oa fall an anvioù a veze lakaet dezho. E-leizh a zañsadegoù dindan an amzer a weler war ar c'hartennoù, met ral eo gwelet kartennoù gant « tavarnioù dañsal » pe « tavarnioù sal dañs » e-lec'h ma veze aozet balioù bep sizhun..



B IN IOU & B OMBARDE



VI ELLE



VE UZE



VI OLON



CLAR IN ETT E

UR VREIZH KREñV HA LORC'H ENNI GANT HEC'H IDENTELEZH

Diskouez a ra ar c'hartennoù-post pegen stag eo ar Vretoned ouzh o sevenadur hag o identelezh. Da vareoù disheñvel o deus lakaet war wel stourmoù ar re-se evit o c'hredennoù.

Gant ar c'hartennoù-post kentañ e veze taolennet rannvroelouriezh kreñv lenneien vreizhat zo evel Anatol ar Braz ha Charlez ar Govig, hag a oa e-mesk diazezerien Kevredigezh Vroadel Breizh e 1898.

Lañs an identelezh a veze kaset war-raok ivez gant an drouized hag ar varzhed, tud hag a selled outo evel lenneien ar gevredigezh vreizhat.

Gant ar c'hartennoù e vez lakaet war wel ivez stourmoù nevesoc'h, evel an hini evit difenn ar brezhoneg a oa bet merket gant krouidigezh ar skolioù Diwan hag ar c'hlasoù divyezhek galleg/brezhoneg e-pad an hanter-kant vloaz tremenet.

Ur stourm sevenadurel all zo bepred, hini harzoù Breizh. Kraf adstigidigezh al Liger-Atlantel ouzh rannvro Vreizh a laka an teodoù da vont en-dro abaoe 1956, ar bloaz ma oa bet krouet ar rannvroioù melestradurel e Frañs.

Ar Vretoned n'int ket stag ouzh o identelezh hepken ; war an tachennoù relijiel, sokial hag ekologel e vezont engouestlet ivez.

Diskouez a ra mat ar c'hartennoù-post pegen engouestlet e vezont war an tachennoù-se. Pa voe votet al lezenn evit disrannañ an Iliz diouzh ar Stad e 1905 e oant savet a-enep ar renabloù en ur stankañ an ilizoù.

War an dachenn sokial e oa en em savet ar Vretoned ivez a-enep an aozioù labour na gavent ket reizh, en ur vanifestiñ hag aloubiñ al labouradegoù.

Ar stourm e Breizh zo ivez stourm evit an ekologiezh, evel ma weler gant ar c'hartennoù-post a ziskouez traezennoù lousaet gant al lanvioù du degouezhet war aodoù Breizh e-doug an daou-ugent vloaz tremenet.

Ar c'hartennoù-post a ro da c'houzout ivez e oa bet stourmet a-enep an nukleel, ur stourm kenurzhiet gant kevread enepnukleel Breizh. Merket e voe ar stourm-se gant an tri bloavezh manifestadegoù a-enep savidigezh ur greizenn nukleel e kumun Plougoñ e Penn-ar-Bed.



AN DISKOUENZADEG EN DISKOUENZADEG : Ar Mor

Pesketaerien Breizh, trumm da daeriñ hag a-wechoù d'en em sevel evit difenn o micher zoken, a zo tomm-tre ouzh o douar ivez.

N'eo ket liammet o engouestl ouzh un identelezh douaroniel hepken. Gant an engouestl-se ez eus ganto ar santimant ledanoc'h da gemer perzh en ur sevenadur, pe e vefent o verdeiñ war morioù ar bed pe e vefent distroet d'o forzh stag. Evel gant ar sonerezh, an dañs hag ar yezh ez eo bet savet ar vreizhadelezh gant ar morioù.

An eoullistri evel an « *Amoco Cadiz* », an « *Tanio* » hag an « *Erika* » deuet d'ober peñse war aodoù Breizh, o doa gwall saotret an traezennoù ha lakaet miliadoù a laboused da vervel. Difennet eo bet ar glad naturel-se, a zo lod eus identelezh mor Breizh hag ur gwir « skeudenn gartenn-bost » anezhañ, gant miliadoù a dud a-youl vat deuet da dennañ, e-pad mizioù ha mizioù, an tireoul pounner ha pistrius-se, kriz e efedoù.

ARNODVA STIL



Adalek 1905 e voe aotreet ober « kartennoù faltazi » gant danvezioù all estreget ar paper, gant ma chome ar pouez hag ar vent diouzh ar reolennoù. Evel-se e kaver kartennoù e koad, spoue, lâr, metal, kelluloid (danvez plastek) pe e danvez gwiaudet pe brodet.

Ar c'hartennoù-se, a veze embannet rummadoù bihan anezho en un doare artizanel, a oa enno doareoù ober ijinek a-wechoù : kartennoù miltamm, kartennoù klevet, stereoskopek, plegus, kartennoù da zidroc'hañ, da skrabañ, kartennoù gant c'hoarioù, gant siloù, gant avelerioù, gant pladennoù, gant toulloù, gant efedoù optek... Hep kontañ an traoù all a bep seurt a vez ouzhpennet : blev, pluñv, bleunioù sec'h... Bresk e vezont peurliesañ ha koulskoude e vezont kaset hep golo, a-raok echuiñ o beaj en albomoù familh a vez miret evel traoù prizius.

Ur c'hrouiñ birvidik

Kaset e vezont da-geñver holl ouelioù an deiziadur met ivez evit an holl draoù a c'hoarvez er vuhez pe evit lavaret traoù eeun pe grevus. Pep tra zo « lavar » neuze : bleunioù, timbroù, livioù... abalamour da embann santadurioù an-unan ha da ziouganiñ an amzer da zont. En un doare siriusoc'h e tiskouez ar c'hartennoù-se penaos e veve ur gevredigezh ma veze un tamm ton bennak en darempredoù etre an dud.

A-fet ar c'hrouiñ, diskouez a reont ivez gizioù hag a cheñch a-hed ar bloavezhioù ha diouzh an deknologiezh. En deiz hiziv, evit tud zo, e c'hallont seblantout kaer-eston, kitch pe divalav-mezh.

Gant tud ar post ez eus bet kaset ivez e-leizh a gartennoù « graet gant an dorn », dic'hortoz a-wechoù. Rak degemeret e vez kement tra, tev pe devoc'h, hag a c'hall bezañ dasparzhet er boestoù-lizheroù, bezañ timbret ha bezañ siellet. Gant an doare ober-se ez eo bet krouet Arz ar Post a vez savet diskouezadegoù stank anezhañ en deiz hiziv.